

SON AR GARANTE BARFET.

Var ton : *Malgré toute la tendresse.*

LAQRE eo en hor c'halonou
An desir d'en em garet,
Unan demeus bon ezomou
Eo ar Garante Barfet;
Destinet eo da bep-unan,
Gant un urz leun a furnez;
E stad bac e chang er bed-mañ
Darn sô contant, darn dies.

O compren gant attancion
Qement-se, bac o selaou
An ecot demeus ar c'hanton;
E respont ouz ar moezion;
M'emeus remerqet o tremen;
Gant un êr gyê ha contant,
Dre va c'hichen, ur femelen,
Pini a ra va zourmant.

Pa m'eus-hi gwelet o tobtat;
Oun comancet da grenn,
Bervi a rê ennon va goat,
Gant an aouen bac ar joa;
Qer troublet e voa va speret,
Qen em boa poan o parlant;
Gouscoude em eus disclêryet
Evellen va santimant.

Bonjour d'êc'h, femelen charmant,
Ha di n d' veza caret!
Ma ouflec'h o pe santimant.



Emoun-me en hoc'h andref ;
 Ma balfec'h guelet an tourmant
 Ho peus laqet em speret ,
 E teufec'h gant ampressamant
 Da zoulaji va c'hlenver.
 Aba m'ameus hoc'h anavet ,
 E concevis evidoc'h
 Un amitie hac ur respet
 N'oufe qet beza brassoc'h.
 Ret-e ve deoc'h beza ingrat ;
 Ma na zeu eus ho costez
 Da gavout anaoudegez vat
 A gement a garantez.

Ar Plac'h.

Tavit gant ho complimanchou
 Hac ho fidelite vras,
 C'houi a zuppos santimanchou
 Na n'hoc'h eys santer biscoas ;
 Rac mo pije, a geid amter
 Evidoun-me concevet
 Un inclination sincer,
 C'houi o pije'n din merqet.

An Den Yaouanq.

Merqet emeus dec'h ho carez
 Dre va feçon da ober ;
 Honnes eo ar guella-moyen
 Da diemenq evit sincer :
 Mes cresqi a rit va zourmant ;
 Dre un distrou qet cruel ;
 Elec'h rêy din soulajamant,
 E tetit d'ober dan mervel.

Ar Plac'h.

Den yaouanq, c'houi peus preparet

Evel ma fot ho gentel ;
 Mes n'en doc'h qet qen rezolset
 D'en em lezel da vervel.
 C'houi a fot d'ê'h va abusi
 Dre ho comzou studiet ;
 Ma ven sot aoualc'h d'o credi,
 C'houi c'hoarsfe var va sujet.

An Den Yaouanq.

Plac'h yaouanq, mar qarit sonjal
 E meur boent eus va bue,
 E velfec'h, elec'h godissal,
 E laràn ar virione,
 Rac e pep seurt occasion
 Emeus roet d'ê'h da gompren ;
 Dre an hirvoud eus va c'halon,
 Pegement en ho carien.

Ar Plac'h.

N'emeus ho quelet oc'h ober
 Nemet evel meur hini ;
 Dibot eo ar voaser sincer
 A eller da rancontri :
 Cessit ta d'am importuni,
 Tavit gant hoc'h amitie,
 Ha ne zeut mui d'en em vanti
 Gant ho fos fidelite.

An Den Yaouanq.

O pebez un dristidiger !
 O glac'har cri ha c'boëro !
 N'oun qet qaret gant va mestres ;
 Guell e din beza marn,
 An eol, dirac va daoulagad,
 Ne ro mui a sclêrijen,
 Ha nemet em bez ne ven mat.

4
E creis an devalijen !

Ar Plac'h.

Truez emeus ouz ho quelet
En ur glac'har qer grevus ;
Ho calon a zo contristet,
Pe ez oc'h un den tromplus ;
Mes ma oufen e vec'h sincer,
Den yaouanq, m'o qemerfe
Eus a vrema da zervicher ;
Marteze me ho carfe.

An Den Yaouanq.

C'houi, va Mestrez, c'houi a blij din
Dreist qement zo er bed-man,
Na bigen nicun na garin
Nemedoc'h-hu hoc'h-unan :
Quittet. quittet an douetanq
Hoc'h eus var va c'harante :
Me en tou dec'h, en assuranq,
Bigen nemedoc'h n'am be.

Ar Plac'h.

Sant Pêr en doa d'e Vestr touet
Enep e adversourien,
Penos ne vije qer manqet
D'e zicour ha d'en difen ;
Allas ! aueouat a raz e le
Qent m'en doa ar c'hoc canet ;
Ar Zant en devoa gouscoude
Teir guech e dianzavet.

An Den Yaouanq.

Sant Pêr en doa dianzavet
E Vestr mat dirac an ol ;
C'houi ganen a zo qen caret,
Qen a rafen ar c'hontrol.

Dirac an ol dut assables,
 Me so prest da zisc'cya
 Penos é c'houi sur va Mestrez;
 Va flijadur ha va joa.

Ar Plac'h.

Diganec'h ne c'houlennan get
 E teufec'h da byblia
 Ar peiz biscoas n'oc'h ens sonjet
 Marteze bete vremen.
 Guell e ve ganen e teufec'h
 Dre ur sacrific benac
 Da brouvi din scler em c'haret'h
 Gant un intencion vad

An Den Yaouanq.

Goulet diganen, va Mestres;
 Ar sacrific a getet;
 Goulet mar getit va buer,
 Ne viot get refuset;
 Nemet ma ellin, q'ant mervet;
 Obten, e creis va iourmant,
 Eus ho compassion ur zell,
 Ractal e varvin conant.

Ar Plac'h.

Den yaouanq, me aineus cl'evot
 E voac'h un den variant,
 Oc'h ens, goude bout comancet,
 Torret meur angajmant;
 Birvigen, hac en lavaran,
 Ne recevin ur galon
 E obteni ma ne allan
 Dre ar genta doneson.

An Den Yaouanq.

Pa form Doue ur femelen,

E crou prest ur par dezi;
 Mes pell e vent, mar en ordren,
 O daou en em racontui,
 Rac-se eta, angajamant,
 Promessa hac amue,
 Grêt ouz re-all, a so neant
 D'an eil evgl d'egules.

Ar Plac'h.

Bremâ me vel patant ha sclêr
 N'oc'h eus qen intañcion
 Nemet da diemen hoc'h amzer
 Ouz va benti, va mignon,
 Abret eta va dilezet,
 Ha retorait adare
 D'an hini ho-peus prometet
 Da genta ho carante.

An Den Yaouanq.

Va Mestrez, credi a allet,
 Ouz oc'h anavout qentoc'h,
 Va speret na bermetje qet
 Carout oicun nemedoc'h :
 Ha mar be ret-din separi
 Dionezoc'h, va c'harante,
 Ampoezonet gant an annui,
 Ne vo qet hir va bue.

Ar Plac'h.

Avoalc'h, avoalc'h, va zervicher,
 Re emeus ho tourmantet,
 Rac brema me anave sclêr
 Pegement em cherisset.
 Mar emeus grêt dec'h anduri
 Un tretamant qet cruel,
 E voa evit oc'h aprouvi

Ha gout ha e'hôni v'oa fidel.

An Den Yaouanq.

O distro leun a garantez
Hac a vir compassion,
Ha possubl e ve, va Mestrez,
E ve touchet ho calon !
Beza meus-me an esperanç
Va velet fin d'am poañiou,
Ha da receo ar recompañ
Demeus va ol hirvoudou ?

Ar Plac'h.

Va Mignon sec'hit ho taelou,
Va Zervicher, me ho ped,
Hac en em cherissomp hen daou
Gant ur garante barfet.
Eus va ferz hoc'h eus anduret
An diveza affliction.
Esperout a ran e reufet
Da accordi din pardon.

An Den Yaouanq.

Evel ma ro ar glis neve
Ar vue d'ar yeot sec'het,
Ho comzou a zeu evelse
Da zoulaji va speret ;
Dre un avis qer gracios,
M'e meus esper da veva.
Nonpas hepgen un den eürus,
Mes un den an eürussa.

Ho torn em hini. va Mestrez,
Ha touomp dirac an Be',
Penos e vimp, bed hor buez.
Fidel an eil d'eguil.
Ne zonzomp mui en hor glac'hañ

N'em garomp ha ni gavo
 Ur Barados var an douar,
 Dre hor plijadurezon.

Var an douar n'ez eus netra
 Qen douç hac an esperanç;
 Alies e ra mui a joa
 Eget ar guir jouissanç :
 Ur präsent eo digant Doue
 Da zoulaji an natur :

Hac e ve hon tromp a rase
 C'hoas e ra deomp plijadur.

Roue an Ee hac an Douar,
 Me anvez ho madelez,
 Hac a rent d'ec'h benor ha gloar,
 Ha graçou a drugarez :
 D'ec'h u hoc'h-unan eo dleet
 Da genta va c'harantez;
 Goude-ze, mar er permetet,
 He c'honservin d'am Mestrez.

C'houi, va Doue, oc'h eus formet,
 Dre un urz leun a furnez,
 Eva da Adam da bried,
 Hac o laget assambles;
 Plijet ganeoc'h, O Puissant,
 E ve din-me destinet
 Ar femelen-mañ qer charmant,
 Ho peus grêt din da garet !

FIN.

E Montroulez, e ti LEDAN, e ru ar Pavet